



57

BUEZ

NAPOLEON BONAPART KENTA,

IMPALAER,

*E Exploajou, e Vaillantissou hac e Dalanchou huel,
abaoue e vugaleach betec e vomanchou diveza en ene-
zen Santes-Helena, dediet d'he Vajeste NAPOLEON III,
Impalaër ar Francischen, gant he zervicher humbl
Fanch ar Marrec, guiader en Guengamp, ganet an
19 a viz Floreal 1804.*

SALUT deoc'h va Impalaër, demeus a vouir galon
M'en an n'em recommand deoc'h, vit goulen ho permission,
Dre ma zê gravet em c'halon ho familliou vertuzus,
A c'houi eus hon govern en n'hon gueffomp everus.

Amâ n'hon strikan d'ho treid, va guir Impalaër,
Evit goulen ouzoc'h eur c'hraç hac ive eur faver
Da imprima buez ho Yeont, hon c'henta Impalaër,
Evel m'en lakan deoc'h aman voar ar paper.

Evit consoli calonou an oll Vretonet,
Pe re a boë he varo a zo oll glac'haret,
Ho sonjal en trahisonou oue bet dezân groët:
Doue d'en recevo 'ne bales an Dreindet.

C'honi a deu ouz e ligne, Doue da rei deoc'h bonheur;
Meulet ravezo da viken, Louis hon Ampereur,
Hac er memes amser ho Map hac o Impalaëres gurion:
Jesus da rei deoc'h ho tri mil benediction!

A deoc'h-oll citoyanet, demeus a galon vad,
Eus en em lemen va zok, evit ho trugarekât,
Pa deuan da sonjal en oc'h humilite
Oc'h eus bet d'am zilaou, vel ma teuit hirio 'n dê.

An annoyou a brononçan, hac hé an dud veritabl,
Dre enno'n e commançan donet 'vit ho trugarekât:
Recevet ez oun bet dre eur galon leal
Hac istimet en presanç ar Vajeste Imperial.

Ho! ma mije avoale'h a speret, talant hac elokanç,
M'en a raje anaveout bremân dre excellanç,
An differanç a zo en Franç anaveet,
Entre an dud treitour hac ar gouir Citoyanet.

Preferet ho deus bet donet da skuill ho goad,
A mervel en ho enor, ken cedi d'ar gombat;
Mes an difficulteou-se, m'en assur 'voaint ket bet,
Ganeomp 'bars er vro-mâ, c'hoas anaveet.

Ken e zomp bet arriet en amzer ar votamant,
Neuze e m'oamp guelet lies a zantimant ;
Mes ar muya voa bet evit Louis Napoleon,
Meulet a vo da viken da c'houarn var ar trôn.

Biscoas na n'omp bet tout deus ar memes ide,
A n'imp beza crouët gant eur memes Doue ;
Pa droan ma memoar voar ar gear a Jaccio,
Enno e voa gannet oteur an oll breuveno.

Er blavez mil seiz cant nao ha tri-uguent,
Ar bemzecvet a viz eost, evit rei deoc'h da intent,
Bars er gear viniguet-se e voa ganet eur buguel,
Hac e voa predestinet gant Doue Eternel.

Hac e voa en e amzer tud d'ar citoyannet,
Demeus an enezen Cors, Napoleon e voa hanvet,
Pehini a zeo bet ar mestr demeus an oll vrezellerien
A guement a zo bet biscoas voar an douar ho ren.

Ar bemzecvet a viz eost, deiz gouël an Assomption,
E oue ganet ar buguel-se ebars en guirion,
Dont a eure e dad Charles memes d'en admira,
A ken couls all e vam hanvet Lettisia.

Prest goude e voa lennet en he interieur,
En devoa eur speret lem ha carguet a ardeur,
Dre e distingcion, hep na ingal na par,
Ma laret gant raison he vije eun eil Cezar.

Rac anaout a rêl ebars ar buguel-se,
E voa predestinet memes demeus an Env,
Dre e dalanchou caër, hac ar siecl deus e oad,
Kement-se d'eur buguel voa tout admirabl.

Na gleske en ty e dad, hac en meurbet yaouanc,
Gant ar vugale-all nep sort divertissamant,
Mont eure a gostez, deuz ho zouesk retiret,
Hac enno e denne portrejo soudardet.

Er blaves seitec-cant naontec ha tri-uguen,
He cassas he dad anezàn d'ar studi da Brien,
Ha ma plaças anezàn n'eur scol a enor,
Lec'h ma veritas cavet eur pris deus a vemor.

Pemp bloaz goude-se, pa voa pemzec vloaz oajet,
E kemeras neuse studi ar soudardet,
Recevet mad he voa pa erruas enno,
Gant eur chef deus ar scol, hanvet Kersalio.

Antren eure en Paris ebars er scol militer,
Goude cavet an enor d'achuin e garrier
An histor demeus a Gors en devoa bet scrivet,
Ma voa gant Leopold e labour admiret.

D'an oad a seitec vloaz ma c'heuil e rejimant,
Demeus a galite d'eus a sous-lietenant ;
Briata e soudardet, deus a greiz e galon,
Bars er gear a Valanç, e guenta garnison.

Pa meus expliket deoc'h ar suit deus e scollio,
Me a za da laret breman eun darn ar victorio

En devoa gonneed hon hero generus :
Ebars en pep andret voa bet victorius.

Er blaves mil seiz-cant nao-ha-pevar-uguen ,
Voa eur revolution vras 'bars en hon zouesk ho rën ,
Ma voa bet kemeret ar gear fertil a Doulon
Dre an ardou subtil d'eus a beurs ar Sozon.

Deputet da vont-di voa an Napoleon ,
Pehini a zougue ar grad a chef a vataillon ;
Combati courajus euré 'vel eur leon ,
Ma oue victorius enno voar ar Sozon.

Ar general Carto a deuas d'en fixa ,
Ho velet he gourach ma teuas d'en admira ,
Pa velas ar pointer lazet var he ganon ,
Ma servichas en e blaç kerken an Napoleon.

En eur guir , bea voa a gren victorius ,
Reculi ar Sozon hac ho renta confus ,
Hac evit recompanç d'eus eur victor ken sten
A oue hanvet en deiz-se general brigaden.

Rac anaveout a rê seler an oll sperejou
A vije ar vainkeur 'bars n'he oll gombajou ;
Crenvoc'h 'vit Alexandr hac ive ar Cesar ,
Anton Natiberus n'a vije dezàn par.

Na neus bet biscoas Ampereur na Roue
Elevet eveltàn ebars an dignite ,
Nac a nefe goneed kement a vataillou
Evel an Napoleon , dre buissanç e armou.

Ar blaves seitec-cant pemzec-ha-pevar-uguen ,
En amzer Robespier , eun den fall hac inhumen ,
En devoa c'hoant da zistruja 'nanter ar gristenien ,
Pitoyabl voa ar Franç ha carguet a anken.

Gant ar c'hlerje hac an noblanç voa a gren revoltet ,
Partout , d'an amzer-ze , voa club ha chouantet ;
Hac ar Gonvansion n'eur form direglet ,
Na voa ken chenchamant nemert goad ho redeç.

D'an amzer se a voa eur brezel inhumen ,
Voa gred revierro a voad demeus ar gristenien ;
Mes an Napoleon dre e gourach ardant ,
Ha lakas tranquil Franç ebars en eun instant.

Ma c'honeas en Paris eur brezel illuminant ,
Savet gant an noblanç ebars en eun instant ,
Ar gard-national eus he c'hoste ha cals a vourc'hichen ,
Ma fellas d'ê revolti a henep ar Lezen.

Mes an Napoleon a deuas d'ho surmonti ,
Hac ar peoc'h general a roas-oll deomp-ni ;
Ar Ministr bras pa velas , a zecoras an Napoleon ,
Dre ma voa bet fidel 'vit ar Gonvansion.

Prestic goude-se , teuer c'hoas d'en enori
Da veza general voar arme an Itali ,
Ous an nation-se hon devoa n'in brezel ,
Hac an hero vaillant na zesire ket guel.

N'hon arriout dirake lavaras d'he bopl :
« Ho! admirapla plaç eo jardin an Europ ,
» Courajomp, mignonet, voar bars neubeut amzer
» He m'omp musuret tout en hed ha ledander. »

An oll keariou capabl a gomeras neuse ,
Argento ha Provera , hac ive Ballie ,
Mondennat a devo hac ive Mandovi ,
Hep dont da espern d'Arcal na Revoli.

Consideromp ouspen en hon general vaillant ,
Hac er victoriou kaër , ha c'hounez bep instant ;
Pemp general vaillant ha neuse c'huec'h arme ,
A c'honeas an Alp ebars ar memes dê.

Ha cals a victoriou-all , a bere na gomzan ket ,
Caeroc'h evit ouman, a neus bet gonneed ;
An Impalaër d'Autrich, assiejet 'n'he gaptal ,
Oblijet da zina ar peoc'h gantàn ractal.

Bars en campo Formio voa sinet an trête ,
Eun faveur Napoleon , ker coulz hac he arme ,
Da distrei da Baris , hac int oll triumphant ,
Sonjomp oll er merit hon general vaillant.

Mes pa voa terminet campagn an Itali ,
Ma voa decidet eas dy an noan da devori :
Ambarqui eure gant he dud ebars en porz Toulon ,
Evit combati Mald , eus a dennou canon.

Passeed a neus Mald , goude he surmonti ,
Evit mont d'ar guear caër eus a Alexandri
Pehini voa kemeret en pouvoar an Turket ,
Hon arme courajus a neusse repousset.

Ha goude ar gombat bars an Pyramidou ,
E c'haret an Napoleon , ha ma lar d'he drouplou :
« En pad daou-uguent siecl ma vezo contemplet ,
» Voar ar muraillo-mâ hon victoriou gravet. »

Bauchi ha Lodi, a meus bet kemeret ,
Jaffa, Jerusalem, a nevoa bet delivret ;
Ar siej divoar Jann-d'Arc, a nevoa bet savet ,
Ha mont en eur gana en triumph d'ar guear a Nazaret.

Victorius e voa en bro an Egyptianet ,
Ha goude ambarkin 'vit kuittaet bro an Turket ,
Hac ho c'huitaet dre Veon, ha voarne victorius ,
Ha neuse debarquin ebars en porz Frezus.

Dont a eure he-hunan betec kear Paris ,
Ha laket kenta consul ebars en he divis ;
Mes allas he absanç nevoa ho glac'haret
En lec'h ho recouran an Itali collet.

An deiz ma ren ar gouël a Sant Yan-Vadezour ,
E c'heas an den vaillant, da gavet he adversour ,
An dervez-se a pignas ar generus Bonapart ,
Carguet eus a gourach , voar menez Sant-Bernard.

Milann a goue en he bouer, hac ive Sant Drio ,
Ha prest goude 'neur bresant voar blacen Marengo ,

Ma nevoa eur gombat vras gant an Autrichianet,
Pa voaint dindan Mêlas he zint bed repousset.

Prest a voant da vervel dre an tan hac ar mintrañl,
Pa n'em bresantas en kichen ar vatañl
Ar general Desaux, vaillant ha courachus,
A la fin m'an eus bet eur maro glorius.

An Napoléon ho reded dre he rejima nchou,
Ha gant eur voes ferm a lavaras d'he drouplou :
« Courachomp mignonet, courjet me ho ped,
» Avançomp hon pachou, ha ne boultronomp ket. »

En pad trivac'h heurves, hep arrestation,
A renas ar garnach entre an diou nation,
Bars er fin ar Francischen ar victor d'eus goneed,
'Vit distrei d'a Baris leun a lore goloet.

Neuse he instituas al Légion-a-Enor :
Pebes encourajamant hon eus paotret an Armor,
Hó ! caëra recompans evid-omp, Bretonnet,
Goude kuitât hom brô ha beza servichet.

Ho cafet an enor da douc'h eur bantion
Digant hon Impalaër hanvet Napoleon ;
En oua ar c'henta mestr 'roas pantiono,
Ha laket hon c'haptivet da retorn d'ho brô.

Neuse ma c'hordrenas digueri an Iliso,
Hac assuri ar veleyen da retorn d'ho brô,
Ha rei deze an urzo d'ober ho fonction :
Ra vezo meulet-da viken hano Napoleon !

Goude rentas d'ar Prinç Eugèn clese he dad,
He vam deuas kerkent d'en trugarecad
Hac ober dezan timmad he declaration
A ma timeas neuse d'an Napoleon.

Eur solennite ar guera voa græt dezan en Paris
Dre m'an devoa græt en Egyp eur c'hampagn a vaillantis,
An-oll maëstro a guear a deuas d'en enori,
Hac ar Pap demeus a Rôm evit en eureuji.

An eil dervez a viz kerzu, er bloas mil eis cant pevar,
En devoa possedet demeus e vrassa gloar,
Ar bonheur hac an enor da sevel var an trôn,
Chetu Impalaër neuse ar mestr Napoleon.

Ma lakas ober neuse labouriou ar c'haëra,
Er guear eus a Baris, me ia d'oc'h explica :
Eur goulonen gaër var blacen Vandôm,
Lakeas d'ober souden an Napoleon.

Gred e zeo gant metal a zaouzec-cant canon,
En tri misves amser goneed gant Napoleon
Var an Autrichianet hac ive ar Russii,
A boes trivac'h cant mil livr, en metal materi.

Bea deuz cant daou droatat ha tregont a huelder,
Ebars en metal bronz, kemense a voeler ;
Var al lein a nezy portret an Napoleon,
Meulet ravezo da viken he famill var an trôn.

Ha cals a draou caër-all 'nevoa græt an Impalaër
'Bars en rouantelez Franc dre vertuz he bouer;
Dezan voa c'hoas ivalention an telegraphou,
Ken prim hac an avel da gaç ar c'helloyou.

Cresket voa gantàn Franc a zaou departamant,
Biskoas na m'ouamp bet eun Impalaër ker vaillant,
'Vel ma zeo bet en he amzer Bonapar,
Biscoas voar an douar n'he oue guelel he bar.

Neuse ec'h instituas eod an oll Lezennou,
Na juger d'èn en Franc nemert dre he règlennou;
Biscoas speret humen na oue dezan par,
Sclerijennet a oue abeurs roue ar gloar.

Prest goude dre jalousi ha voa en em unisset
Teir gurunen assambles deus he ennimiet:
Ar Russi, ar Sued hac an Autrichianet,
Mes an Napoleon a voa evite-oll prepartet.

Prompt evel eur luc'heden he savas kan Boulogn,
Evit en em hresanti d'è, ma eure neuse son;
Dre eur charich everus, hac eur gourach ardant,
Ma kemeras Vienn, hac èn 'voa triumphant.

Alexandr ha Frances gant he oll armori
A n'on gampas neuse ebars en Austerli;
Courach an Napoleon, evel an ordinal,
A gonserv ar victor d'an drapo imperial.

Ma combatas neuse roue ar Prussianet
Allied d'ar Russi ha d'he ennemiet,
Bataill Gén ha Sufit hon rentas triumphant,
Hac hou arme kerkent antreas en Postant.

Goude fin ar gombat, tre ar pevar Impalaër,
Ma voa sinet an trête ebars en hon faver,
Ha ma retornjomp en Franc carguet eus a lore,
Gant cals avantajou dezan ha d'he arme.

Treñ a eure c'hoas he armou enep ar Portugal
'Vit dressàn an affero, ar c'honvers en general,
Ha trôna e vreur Joseph, en Spagn goude ar victor,
Bepret voa he famill ebars en he vemor.

Kuittat a eure ar Spagn ho clevet e voa troupo,
Deut eus an Allemagn evit ravaji ar vrô;
Ma c'heas d'ho rancontr gant eun arme vaillant,
Ma kemeras Vienn, Napoleon zo triumphant!

Bataill Wagram a voa ar c'huoc'hvet a vis gouellen,
Bepret e man courach an den vaillant ho ren,
Gonnid ha rê dre oll gant neubeut a droupo,
Ha mont a rê partout voar refus an oll vestro.

Ar peoc'h a voa sinet en Tilsit, en Russi,
Er blaves mil eis cant-seiz, ma keret va c'hredi,
Ma voaint oblijet d'en anaout patand,
Ha couls-all he vreudeur en Napl hac en Olland.

Trônet a voa Jerôm ebars en Wesphali,
Gant an Napoleon, en faç ho ennemi,

Ha d'he c'hoar Paolin e roas duche Goustalla :
Laket en devoa he oll famill da vrilla.

Gant he gourach ardant pa voa var ar bed ,
Ma rê pep tra-oll hervez ma nije souhed ;
Gouscoude voaint oll ebars en e enep,
Hac ên ho c'hare tout dre garantez barfet.

An Impalaër d'Autrich zevas c'hoas d'en attaki,
Ho sonjal beza vainkeur voar he ennemi,
Ha clask moyennou evit en distrona,
Mes dont a reas e-hunan d'en eur drompla.

Ho! ya sur en bras ên an devoa manket,
Demeus fonç ar Spagn c'heas c'hoas d'en kavet
Ha m'an devoa ar victor voar nezan raportet ,
'Bars en he bales he c'heas pront d'en gueleet.

Evit clevet gantân petra voa ar sujet
Hac an occasion d'he c'hir da veza chenchet,
Da dislaret an trête ho devoa en Wagram gret,
Ma c'houlennas outân eskus dre garantez barfet.

Digant an Napoleon d'en beza trahisset,
Pehini en pardonnas gant cals a respect,
Gant ma raje dezân e verc'h 'vit eil pried
En prejudic d'ar guentân, Josephin voa hanvet :

« Da dont ganin en Franç da veza eureujet,
» Ho merc'h Mari-Louis a renkan da gavet,
» Ma sonjet antren em c'hraç ha beza mignonet,
» Ha c'hoas 'bars an accord, vefet d'in predessesoret. »

An dervez kenta a ebrel mil eis cant decvet ,
Oue an Impalaër da Vari-Louis eureujet,
Gant celebration vras ha pep rejouissanç
'Zeo gred Mari-Louis Impalaères en Franç.

Goude e concluont c'hoas ober dezân trahison,
Vel ma voa ambition fal bepret en ho c'halon ;
Dre ar jalousi vras e voa eus Napoleon ,
Nos deiz ho clask an tu d'he exilation.

Lezet oue d'ober c'hoas eur c'hampagn destinet
Kasi 'vit perissa en touez ar Russianet ;
Mes na gomzid ket nemeur voar gampagn ar Russi
Rac ma c'halon so tener hac hounez a voa cri.

An oll elemanchou troed enep eun den,
Perissa renko-zur, kement-se zo certain,
En obstant d'he vaillantis ha d'he generosite ,
Ha pêvar c'hant mil den pere c'hoas en heuille.

En mil eis cant-daouzec, Doue voar ar vouirione,
Dre ar gear gaër a Vienn facil a tremene,
Hac ar vataill en Esmolensk pehini a c'hone,
Na voa kear ebet outân a guement a resiste.

Neuse he kemeras ar gear gaer a Voscovi,
Ha kerkent he c'hassiejas capital ar Russi,
Ma voaint oblijet dezân neuse oll tro-var-dro,
Ha da renta en he zorn tout an oll ale'hoeyo.

En pad tri dervez antier en d'oa ho fossedet,
Oll alc'hoeyo an Europ deza n'eun soumetet,
Scriva eure d'he arrier-gard dont neuse d'en kavet,
Mes ar general voa gante an deveus en trahisset.

Hac int deus ho c'hoste a zeuas da gonclui
Lakat an tan en kear evit dont d'he devi,
Dre urs ar gouarner, Rastophin voa hanvet,
Ma voaint oblijet neuse, allas ! da squei ar retret.

Da zonnet var ho c'his en creis ar goanv calet,
Pa na voelle enni, gallout n'hon sovetaet,
Difi gant an naon ha fatig gant ar sec'het,
Er passaj Beresina he zint en em arretet.

Lekomp hon daouarn var hor c'honstianç,
Hac avouomp hardi, en trezomp pobl a Franç,
Penaos na garjemp ket beza enno d'ar c'house,
Da voelet na da soufr ar seurt mizeriou-ze.

Evel m'an devoa gred sur an Napoleon,
Partout dre lec'h ma tremene en a zougue an trôn,
Evit lakat Franç d'imp 'barz n'he frosperite,
Evurus he voamp cavet eur souveren evelse.

Rac pa sonjan 'bars er passach-se bremâ,
Ar goad em goasied a deu oll da sclassa,
Hac ar pont ho creuvi dindan an artillieri :
N'ac a francischen guez voa enno ho veuzi.

Ha pa sonjan ouspen ebars em c'halon
Ar boan hac ar vizer an devoa Napoleon,
Ho lakat Franç d'emp en liberation,
Hac evit recompanç voa gret dezân trahison.

Ma c'halon zo arri tener, n'hon ket ha me allo
Recita ar c'hinviat 'bars en Fontaineblo :
Briata ra enno neuse he soudardet,
Gant eun amitie vras hac he generalet.

Briata ra enno ar general Pety,
Ho laret evellen, pa deu d'en ambrassi :
« Ret e vo d'in ho kuittât, ma c'hompagnon ha c'hloar ;
» Ho ! trista callonat, ha cruella glac'har. »

Ma sortias neuse eus an exil à l'Il d'Elb,
Mes eur vouez truezus ha glêvet evellen :
« Hon zad ! Hon zad ! pelec'h hoc'h diouzim separet,
« Sicourit ac'hanomp eus hon ennemiet. »

Glac'haret eo e galon ha karguet a ganvo,
Hac ouspen, assuret, e speret a droublo ;
Distrei a ra en Franç en avis d'hon assista,
Breman c'noui glevo he drahison diveza.

En assamble a Vienn nevoa bet skrivet,
Delivra trahison ebars en he enep,
Kuittât a ra Paris neuse an Napoleon,
En avis combati, mes allas ! trahison.

Mont a ra da gombati evel Genton ha Blucher,
Assambles en Beljik voar goste ar rivier,

Napoleon a attak vilajeno al Leji
Hac ho c'hemeret oll en faç ho ennemi.

Divoar bennou va daoulin gant eur galon leal,
A c'houlennan pardon ous ar Vajeste Imperial,
Kent evit comz amàn demeus an trahisono
A voa livret dezàn ebars en Waterloo.

Possubl a ve eun dèn evel predestinet
D'indan mouez an drahison perissa vo ret;
Ho! servicher ingrad, houmàn eo da recompanç
Goude da veza trètet gant calz a gomplaisanç.

Eun diskip infidel nevoa he vestr trahisset,
Ma eure kement-se dre an avaristet,
Judas prest goude a c'heas d'en eur grouga :
Nep a sko gant eur c'hleze a berisso dreiza.

Colloneno Franç a zispak en Fleurus
Hac armeou Blucher a zispak gant dizurs ;
Mes an Napoleon bepred ho attake
Ken ma voa trahisset ebars en andret-se.

An drahison a voa sanglant hac inhumen,
Ar general Cambron en em bresant kerkent,
Ha d'an Napoleon a neveys lavaret :
« N'in varvo he combati 'raok beza kemeret. »

Guir eo, trahison-so, mes ken fin ar gombat
N'in a nevo arrosset ar blenen gant ar goad ;
Hac ar grenadourien ha gombate ganta
Ken n'a deue ar Sozon enno d'ho admira.

Mes allas! en defot cavet kartouchen
Ho devoa ranket combati d'an armou guen,
Ha treuja kerkent ar rivier a Leipsy,
Enno voa beuzet ar Ponniatawski.

Ho sonjal pellât demeus he ennemi,
Ma eure da Napoleon cals demeus a annui ;
Ar pechou danjerus a voa partout stignet,
Var ar fin dre valheur e zeo bet oblijet.

D'ar gueur deus a Baris a la fin da zonnet
Ken ma c'haljont biskoas donnet d'en kemeret ;
C'hoas a reas d'hê trôna he vap kenta roue a Rôm,
Araoc sina dêze he kuittaje he drôn.

Chetu neuse victorius, Blucher ha Welengton,
Hon hero generus en pouvoar ar Sozon ;
Cri vije ar galon ma na vije annui
Ho clêvet an Napoleon enno ho kinviadi.

Laret a reas adieu d'he Impalaères guirion
Ha d'he vab a gare deus a greis he galon,
D'he aigl imperial ha d'he diou gurunen,
Ha laret dezo kenavo 'vit biken.

M'ho ped d'ho froteji en trezoc'k Francischen
Ha calz a villionou a lezan ganeoc'h ouspen,
Da rei pantionnou ha da soulaji ar bevien
Ha Doue da recompanci ar vad oberourien.

Ha d'ho c'hamanti tout demeus ho zrahison,
Keun ho pezo goude ebars en ho calon,
Donnet d'am exila goude ho proteji,
D'am lakat da vervel dre boan ha dre annui.

Recompançi a rer va generosite
Dre ar brassa crueldet pa blij gant Doue,
Ha pedi ràn d'ho conserv en prosperite
Ha graç deoc'h da veza frankil'va goude.

Me c'houlen evit test an Env hac an astrou
Hac ar blessuriou a meus en kals a andrejou,
Ha grio oll venjanç en presanç eun Doue
Demeus an drahison a rentet d'in hirie.

Na neus hini ac'hanoc'h n'en prenfes gant va goad,
Ha dre ambition fal c'houi ra d'in ho kuittât;
Allas! dre an anvi deus va oll actionno
Ma zoc'h oll revoltet d'ober d'in chènch a vrô.

Mes na meus ket a speret d'allout explika
An adieu caër nevoa gret an Ampereur vaillant-ma;
Evel-se a renkan abreji ma matier,
Va fen a zo skuis ha va memor zo ber.

D'an enezen Santes-Helena ho deus-an bet kasset
D'ar c'hóloniou pell 'bars ar mor situet;
En he c'huanano diveza ha zesire bepred
Ma vije ar Francischen he bopl muya karet.

En trezoc'h citoyaned c'houi en kar hep dout,
Troît ho sellou voar nezan en eur stad ha hirvout,
Eur pastor separet demeus he verjeri
Pe eun tad ha famill chasseéd deus he dy.

En enezen Santes-Helena pa zeo bet debarket,
Ho tistreï ouz Franç en eus bet lavaret :

- « Adieu deoc'h Francischen, nation generus,
- » Esclav z'oun 'vit biken hac eur malheürus.
- » Ha te Georj miliguet, monstr d'an æle,
- » Te ha receo an oll ganailles hac a repu anêze,
- » Ha bremâ eun Impalaër deus ar vertuussa
- » Ebars en dizesper en lezi da berissa.
- » Malheur da viken, an heur ha moa d'a espergnet,
- » Ma karjen te bremâ vije bouët d'ar pesket;
- » Te ha bromet ordinal eals hac a ro netra 'bet,
- » Ha ne laboures james 'n met vel ar filoutet.
- » Te zo bet ous Franç ordinal an ampetuosite
- » Gant da outrajou fall ha da oll adversite;
- » Mes me c'houlen a galon ar c'hraç digant Doue
- » Ma reï Franç ha te eur veach ar guir drête.
- » Hac eur peoc'h padus pehini a bado
- » En pad an eternite 'vit ezamant ar vro,
- » Hac evit prosperite an daou rouantelez
- » Me garje ho guelet oll ebars en ho hêz. »

Neuze a valeas en enezen ha dreuz hac a hed
Ha da Santes Helena e zeo en em recommandet :

« C'houi zo bet martyres pa voac'h var an douar
» Ha me zo bet exilet 'vit recompanç d'am c'hloar.
» Helena, c'houi a vel va oll adversite,
» Intercedit evidon en presanç va Doue,
» Ma mez'in ar bonheur pa guittaïn an douar
» Da velet va Salver ha possedi he c'hloar. »

Er blaves mil eis cant-unan-var'n-uguent,
Ar bemped a viz maë, 'vit rei da intent,
Deus ar beure ma crias : « Francischen, Francischen,
« Roit d'am mab va hano ha non pas netra ken. »

Neuse voa digasset da guichen he voele
Portret he vab memes pehini a gare ;
Ha dre ma kreske he boan a lare bep termen :
« Roit d'am mab va hano ne c'houlennan netra ken. »

En e amzer diveza mervel a neus desiret
En lezen catholik en pehini voa bet ganet ;
C'hoas ho tesire ouspen an Napoleon
Ma perseverje Franç en ç guir religion.

Neuse a c'houlennas ma vije he gorf ambomet
Eur veach 'bars en Franç ha vije c'hoas desiret,
Po dije c'hoas amantet ho zrahisono
He kerchont anezan a greiz ho c'hallono.

Da bemp heur deus an noz, disting ho lavare,
Ha ben diou pe deir guech en presanç he arme :
« Ret e vo finissa me ha vel kement-se,
» Ha mont da renti kont dirac ar guir Doue,
» Demeus an drouk hac ar vad e meus grêt em bue,
» En em apparissan dirag ar sent hac an êle,
» D'en eur justifia dirag ar guir Vajeste,
» Mes m'ho recompanço araog deus ho fidelite. »

Montollon ha Bertran ha vriatas da ziveza,
An daou-ze a voa ive he vignonet brassa
Hac e voaint êt de c'heul betek e ziveat moman,
Ar rêze en c'honsole bepret 'vit ar muyan :

« Adieu laran deoc'h oll dre eur guir garante,
» Doue d'ho menteno tout en ho prosperite ;
» Adieu laran da Franç ha d'he soudardet vaillant,
» Gant eur rêzon ouspen, vijes mestr d'ar firmamant.
» Adieu eta Francischen, goueachal va fobl,
» Ma vijec'h bet d'in fidel pije goneed en Europ ; »
Neuse voar he beultrin he zivrec'h a groasas,
Ha dre eun agoni douç he vue a finissas.

Ar pez a zeziras deus a greis he galon
Ma c'harrije he famill c'hoas da sevel voar an trôn,
Chetu deut da voir oll souhêto an Napoleon :
Meulet ravezo Doue ha gantan he drôn.

Cals zo ous va chelaou, ha Pipi pe Yan a laro :
« Goude maro eun dên ve grêt he elojo ; »
Mes mar zo dên en Franc capabl d'en emitâ,
Gred, ha me rayo c'hoas er vroyou komz anezâ.

Na rit ket va elojou 'vit oll-vad ar bed-mâ
Ha goude kuitât an douar ar gloar da jouissa,
Deoc'h oll ha souhetan eur bonheur ken parfet
Da bossedi ar c'hraç da vont d'ar joaüstet.

Cals a destou e voa enno pa zeo maro
Hac a deuas en Franç d'annongi ar c'hello;
Hac evel ma c'hleb ar garek 'bars creiz an od
He tiruille an daëro divoar ho diou chod.

Ho clêvet ar maro cri deus an Napoleon,
Lakas ho c'halonou oll en desolation;
En pad tri bloaz ha tregont oc'h ober he ganvo,
Ken a zeo arri he niz d'a c'houarn hor brô.

Meulet vezo da viken ma zeo deut d'hon c'hommandi
Ha Jesus, hon Salver, ha bedân d'en conservi,
Ha da rei dezân ar c'hraç da veza triomphant
Voar guement ennemi han eus antieramant.

Kemeret a neus Sinobl ha bombardet Odessa,
Hac ar guear a Vomasson reduiset da netra;
Ha dre ar gourach ardant deus an Napoleon,
Voar muraillou Sebastopol 'neus plantet hé pavillon.

Repousset n'eus ar Russianet, 'n despet d'ho furi,
Ha delivret a c'hanomp demeus ho oll tirani;
Digasset n'eus deomp ar peoc'h eus a greis ar bresel,
A calmet ar guernes, hon chatie cruel.

Biscoas n'hon eus bed Ampereur na Roue
A gnement hon difenje gant ker bras dignite
Evel ma ra deomp Louis an Napoleon:
Meulet a vezo da viken he c'hano voar an trôn.

Ha perac na m'eus-me ket elokanç Ciceron,
Hag ive ar furnes en devoa Salomon,
Eur gueno en arc'hant pe enn teot allaouret,
Da soueti deoc'h, Ampereur, ar bonheur a veritet.

Mes ne m'eus ket a speret da ellout esplican
Deoc'h, ma Ampereur, evel ma tesiran;
Mes me a bedo Jesus hac he vam ar Verc'hes,
Da skuil var ho famill da viken ho madeles.

An discouriou re-hir a zeu da annuya,
Rag-se, ma Impalaer he c'han da finissa,
Rag-na-ven re importun d'ho guir Vajeste,
Me c'houlén mil excus dre eur guir garante.

Doue d'ho conservo dious an drahisono
A beurs an estranjourie, pa deuont d'ar vrô;
Jesus ha Mari ha bedan d'ho preservi
Demeus ho oll maliç hac ho ingratiri.

FIN.

Propriété de l'Éditeur :

J. H.